

IMBOURC'H

31 Here 1972

Niverenn 34

IMBOURC'h, KE LAOUENN BOLITIKEL

Trede bloavezh

Niverenn 34

31 Here 1972

E ser ur prosez.....	p.227
O tont endro eus an trede bed.....	p.232
Danvez labour.....	p.234
Keleier liesseurt.....	p.243
Geneliezh ur c'homunour.....	p.247

Ar pennadoù embannet gant izili eus E.B.V. ebarzh IMBOURC'H ne enouestlont e nep doare an aozadur e unan.

Koumanant-bloaz : ugent lur (20 lur). K.R.P. : Y. Ollivier,
1 534 25 Roazhon. Deraouiñ a ra ar c'houmanant-bloaz e miz Genver.
Priz an niverenn : 2,00 lur. Ar pennadoù a zo da gas da Y. Ollivier,
7 bd. A.-Burloud, 35 000 - Roazhon.

CPFP : 50 015

E S E R U R P R O S E Z

Echu eo a-benn ar fin prosez ar brizonidi ha kaset eo bet an holl vrogarourion d'ar gêr. Poent e vefe tennañ ur gentel eus an darvoudoù-mañ a zo o paouez c'hoarvezout. A-hend-all, meur a wech hon eus klasket henn ober e ser harzidigezh ha toullbac'hidigezh ar stourmerion. Merket hor boa, pergen, e oa amsteriekoc'h obererezh al led-F.L.B.-mañ eget hini ar F.L.B. kentañ.

Ne vern. Edod o c'hortoz ar gwashañ ha moarvat e sello darn eus ar stourmerion ouzh an didoullbac'hidigezh-mañ evel ouzh un trec'h. Mat eo eta klask resizañ ster an darvoud-mañ.

Hemañ eo avat ar goulenn kentañ a sav : perak o deus kavet ar C'hallaoued gwell kas ar brizonidi d'ar gêr eget o derc'hel en toull-bac'h e-pad un toullad bloavezhioù evel ma oant enwiriet d'ober hervez o lezennoù ?

Liesseurt eo e gwirionez arbennoù an emzalc'h-mañ. Unan anezho a denn da zoare ar renad gall er mare-mañ a chom ur renad frankizour evit ar poent. Unan all a zo ar c'hendegouezh etrevroadel e unan : n'en em sant ket ar C'hallaoued en arvar evel m'en em santent etre 1930 ha 1940 pa oa Hitler o prientiñ ar brezel. Hiziv an deiz ez eo sioul bras kevandir Europa dindan "disglavier atomel" an Amerikaned (hep kontañ hini ar C'hallaoued o unan petra bennak ma chom hemañ arouezennel e-keñver hini an Amerikaned). War ar marc'had ez a un argerzh kenframman hag unvaniñ war-raok en Europa, ha daoust ma venn atebeion ar Stad c'hall gorrekaat an argerzh-se ez ouzont mat e tisoc'ho hemañ un deiz da savidigezh ur gengevrediezh en Europa.

Daoust ma kendalc'h Bro-C'hall da c'hoari roll'ur galloud-meur e oar mat ar renerion anezhi ne glot ken ar roll-se gant kalz tra. Dre se eta ez eo koazhet da vat ar vrogarouriezh he doa entanet ar vroad betek fin ar brezel diwezhañ hag un tamm war-lerc'h, ha da gement-se moarvat ez eo kiriek an impalaeriezh dilezet hag ar brezelioù tramor kollet. Kempoell eo eta emzalc'h ar pennadurezhioù gall en degouezh-mañ gant saviad gwirion Bro-C'hall abaoe dek vloaz bennak.

Arbennoù all a zo ivez moarvat. War un dro ez eo morc'hedet ar C'hallaoued o c'houzout n'int ket bet reizh e-keñver Breizh. Tamallet ez eo bet a-walc'h o folitikerezh unyezhañ e Breizh ; diouzh un tu all ez anavezont a-walc'h istor Europa evit gouzout n'eo ket par degouezh Breizh ouzh hini nep rannvro a "Frañs". Dre se e komprenont e ve emrenerion e Breizh ; evel-se ivez e c'heller poellañ diskleriadenn kadoriad al lez-varn d'ur mare : penaos ne oa ket ar gouarnamant gall enebet ouzh an emrenerion ; n'o doa ar re-mañ d'ober nemet emstrivañ da dapout dezioù en dilennadegoù da zont (pezh a glasko ober, a-hervez, SAV hag U.D.B.). Anat eo avat n'eo ket chalet ar C'hallaoued gant ar rakwel-mañ. Emgann an emrenerion n'eo, evito, nemet un emgann dilost-lu ; distrujet eo ar brezhoneg, d'o soñj : o skolaerion o deus graet mat o labour ; diseblant eo ar bobl vrezhon a-hend-all, a gredont. Dre se n'eo ket dav dezho en em chalañ : an dilennadegoù ne rafent nemet diskouez e chom ar Vrezhoned stag ha leal ouzh Bro-C'hall. Didalvez eo eta ober merzherion eus tud ha n'int, war o meno, nemet istrogelled pe ziskianted mat da gas da di ar re sod ma vije lakaet da dalvezout e Bro-C'hall pleustrevezh mistri ar Stad soviedat a gavont yac'hus meurbet moarvat.

Pezh a gadarnafe an dezrannadur-mañ ez eo dres sellboent ar c'hedveno gall e-keñver an Emsav e unan. Lezomp a-gostez an "Humanité" hag ar P.C.F. ha n'o deus rannet ger diwar-benn ar prosez, da skouer. An darn-vuiañ eus ar re all a ziskouez pe o deus diskouezet an Emsav evel un embregadenn romantel. "Les desperados bretons" a skriv an "Express", lakaomp ; ar gleizelourion hepken a zo techet d'an Emsaverion, marteze peogwir emaint o unan pell diouzh ar galloud evel an Emsav e unan. Hogen war "bParis-Match" - e-lec'h e kaved div bajennad luc'h-^{gouestlet} skeudennou d'an "Emsaverion" e reer anezho tud livus ha dedennus a seurt gant "Asterix", dizañjer ha divarrek a-hend-all avat.

Dre se ivez n'en dije ket komprenet ar c'hedveno gallur varnedigezh kriz he dije skoet ar speredoù ha roet da grediñ e oa an Emsav siriusoc'h eget a soñjent o unan.

Pezh a ziskleir ivez damantiz ar varnerion eo amsteriegezh an obererezh renet gant ar stourmerion. Hemañ ne oa ket sinet zoken. Hogen sklaer eo evelkent ne oa ket ar Stad c'hall an hini a oa taget war-eeun ; embregerezhioù pe dud prevez, ne lavaran ket ; kargidi ar Stad c'hall avat n'en em santont ket rediet da veñjiñ ur vourc'hiziezh c'hall ha n'eo ket emouez outi hec'h unan evel renkad, n'eus forzh penaos, (nemet en un nebeut kelc'hiadoù enk e ve).

Erfin, dre nerzh an traoù o unan ez eo bet degaset ar vreutaerion da lec'hiañ ar prosez en ur par ledemsavel. Ouzh kael an testoù ez eo bet lakaet da zibunañ pennañ dileuridi al ledemsav (gant un nebeut emsaverion digenvez hogen brudet da blediñ gant ar yezh hepken). An damallidi o unana-hend-all o deus c'hoariet ar roll a

c'hortozed diganto hag a oa ivez hini ledemsaverion-
a-fell-dezho-degas-evezh-ar-pennadurezhioù-war-enkadenn-o-
-rannbarzh. Unan hepken n'en deus ket c'hoariet ar roll
a c'heded digantañ : Y. Gourvez an hini eo hag an hini
nemetañ a oa bet stummet evel un emsaver. Hogen kastizet
eo bet dres evit bezañ nac'het c'hoari mat e roll, o
prezeg brezhoneg el lez-varn pergen : da bounneroc'h
kosp eo bet barnet eget tamallidi all a oa gwashoc'h o
felladennoù eget e hini koulskoude. Dre se e tiskouez ar
C'hallaoued - pezh a zo natur - ez int prest da c'houzañv
ul ledemsav zo betek ur poent zo hogen n'int ket darev
kennebeut da lezel Breizh da adsevel dre gaer.

Evit an holl abegoù-mañ ne gredan ket nemeur
e c'heller ober un drec'hadenn vras eus ar varnedigezh
didaer a zo bet nevez embannet e Paris (n'eo ket un
drec'hadenn kennebeut evit ar C'hallaoued ; e devoud
e laka ar prosez-mañ anat ez eo an tager ken gwan hag
an tagad en degouezh-mañ ; n'eo ket erru an Emsav e
par ur stourm gwirion).

Evelato e c'heller merzout meur a elfenn yaus
er varnedigezh-mañ. Da heul ar prosez e c'heller gwiriañ
ez eus o tiwanañ hag oc'h anadiñ e Breizh ur c'hedveno
ledemsavel a zo prest da sammañ kiriegezh oberiadennoù
feuls zo evit tizhout e balioù. Ha rak-se moarvat ivez
n'o deus ket kredet ar varnerion c'hall kendaoniñ da
vat ar vrogarourion en em gave dirazo.

D'an eil, un dro ez eo bet ar prosez-mañ evit
luskañ e-touez stourmerion liesseurt (dreist-holl
e-touez studierion e Roazhon pergen) ur bruderezh brogar
ha na vije ket bet renet a-hend-all. Sachet em eus
evezh al lennerion ouzh mankoù ar bruderezh-se hogen

un dra vat eo bezañ gellet dastum kantadoù a dudoù yaouank ebarzh bodadegoù evit difenn ar brizonidi ha brudañ keal ar vroadelezh hag ar frankiz evit Breizh, daoust pegen forc'hellek bennak e oa diazez ar stourmadenn vrudañ-mañ.

Evit klozañ :

- Ne c'heller ket lavarout ez eus bet anv e ser an oberiadennoù feuls a zo bet kaset da benn abaoe daou vloaz hag ar prosez a zo bet renet nevez zo eus ar stourm etre an Emsav hag ar Stad c'hall, lakaomp. Ar vrogarourion a zo bet mesket er gobidell-mañ ne oant atebek dirak aozadur na framm brezhon ebet. Dre se ned eo an afer-mañ nemet un degouezhadenn ha n'eo ereet ouzh pleustrerezh emsavel ebet ha rak-se e c'hell stroll pe stroll, e stumm pe stumm, korvoiñ anezhi war wel amkaniou zo ha n'int ket emsavel rik e meur a geñver ;

- keit ha ne vo ket un Emsav frammet e Breizh ne c'hell ket seurt darvoudoù bezañ implijet e sell da balioù an Emsav e unan ;

- n'eo ket anat e c'hellfe ur sponterezh gwirion gwerediñ en un doare bennak e Breizh er mare-mañ. En tu-hont d'ar c'hudennoù buhezel a laka da sevel, ez eo anat n'eo ket al ledemsav - an hini nemetañ a c'hell tennañ mad eus ar sponterezh - evit mont war an hent-se en tu-hont d'ur vevenn zo ; maz afe ar sponterion pelloc'h war an hent-se en em gavfent hep dale o unan penn-hep ledemsav nag emsav ebet d'o harpañ ha d'o skorañ.

- Dre se, en ur prantad a beoc'h evel hon hini ne c'hell an Emsav kaout da amkan nemet ledañ e frammadurioù a bep tu hag enstummañ al ledemsav e pep doare, dre emskiantekaat ha kenurzhañ ar bobl vrezhon e seurt doare d'ober anezhi ur vroad wirion.

O tont endro eus an trede bed.

Ur c'heneil am eus a zo aet da labourat evel tironiour en Arc'hantina, un nebeut bloavezhioù zo. Fiziet e oa bet ennañ termenañ an holl lec'hioù spletus evit sevel fardelloù a-hed aradennad an Andoù. Evit prantad kentañ al labour-se e oa ret dezhañ studiañ a-dost aerluc'hskeudennoù rak dic'hallus e vije bet evel-just ergerzhout ar riez a-bezh, o vezañ maz eo ec'hon kenañ hag ennañ gwall nebeut a zouarhentoù c'hoazh. Goude bezañ dibabet un nebeut lec'hiennoù o vefe tu da c'houde da vont war an dachenn evit studiañ ar reier...

Evit kaout an areluc'hskeudennoù-se ez eas da gavout tud ar me-lestradur arc'hentinat. Siwazh evitañ e voe respontet dezhañ e pep lec'h e oa dic'hallus kaout seurt luc'hskeudennoù. Mont a ra aradennad an Andoù d'ober an harzoù etre Chile hag Arc'hantina ha tabutoù zo etre an div riez abaoe ur c'hantved evit kudenn an harzoù-se. Ur "c'hevrenn soudardel" eo eta kement tra a sell ouzh ar menezioù-se, kartennoù pe luc'hskeudennoù. Goude bezañ kollet meur a zevezh o vont eus gwazva da wazva hag eus maodierndi ha vaodierndi, en em gavas gwall zigalonekaet va c'heneil.

Soñjal a reas d'ar poent-se mont da welout ur c'hevredad norz-amerikat en doa burevioù e Buenos-Aires, ur c'hevredad a oa e bal imbourc'hiñ an eoulvaezioù, ma ne fazian ket. Pemp munutenn goude e oa gantañ an holl aerluc'hskeudennoù, en doa ezhomm anezho, gwerzhet evit ur priz dister, raktal, aerluc'hskeudennoù eus an dibab, kemeret gant nijerezed arbennik pe zoken gant un amgerc'hell marteze...

Seurt skouerioù a c'hellfe reiñ a vil vern pa gomzer eus broioù an Trede Bed. Savet eo an holl gartennoù eus broioù Kreizamerika gant skolioù-neur ar Stadoù-Unanet, moulet eo ar moneiz-paper e darn vrasañ ar c'hevandir amerikat gant an American Banknote Company hag an Thomas DeLarue Company, deou gevredad eus ar Stadoù-Unanet. Moulet eo un darn vras eus an timbroù afrikat en Europa, e Bro-C'hall pe en Helvetia. Ne gomzan ket evel-just eus stad an armerzh hag ar c'henwerzh en holl vroioù-se rak anavezet-mat eo gwikefreoù an isdioreadur bremañ, met santet e vez ar sujidigezh war dachenn ar sevenadur ivez. En ilizoù Perou pe Vrasil, em eus klevet kantikoù moredu savet e Bro-C'hall ugent vloaz zo (Gelineau,

h.a...) pa'z eus gant ar pobloù-se ur sonerezh poblek ha kanaouennoù kalz bourrusoc'h eget e Bro-C'hall ha dreist-holl o klotañ gant ijin ar pobloù-se. Ha c'hoazh strivoù bras he deus graet an Iliz, n'o deus ket graet c'hoazh gennadoù all eus ar gevredigezh.

-Ar pep grevusañ a seblant din bezañ an dra-se : n'en em anavezont ket o-unan ar broioù-se pe en em anavezout a reont gant daoulagad an estren. P'eurliesañ, dre m'eo dizek darn vrasañ ar boblañs ha dinerzh ar melestradur, n'heller ket kaout stadegoù sirius diwar-benn armerzh pe boblañsouriezh ar vro. Ret eo d'al leviourion ober gant stadegoù an aoza-durioù etreriezel evel an ARU (Aozadur ar Riezoù Unanet, UNO e saczneg) savet gant arbennigourion estren kaset war an dachenn. Alies ez eus bankoù pe gevredadoù estren a anavez gwelloc'h stad an armerzh eget maodier-ned ar gouarnamant. Gwasoc'h eo c'hoazh eo c'hoazh war dachenn an istor. Evit ar mare ez eo skiantourion, hendraourion hag istorourion alaman, gall pe norzamerikat a anavez ar gwellañ istor ar sevenadurioù kozh evel hini an Inkaiz pe ar Vayaiz (Prescott, Baudin, Blom, Soustelle, h.a...). Temploù maya Gwatemala hag Honduras zo bet furchet, kempennet hag adsavet gant skolioù-meur ar Stadoù-Unanet, gant ar Rockefeller Foundation pe gant an United Fruit (o deus kaset d'ar Stadoù-Unanet un darn vras eus ar c'hizelladurioù ha bravigoù o doa kavet). Evit studiañ tremened ur vro eus an Trede Bed ez furoc'h alies mont d'ur skol-veur er Stadoù-unanet pe en Europa eget mont d'ar vro-se war-eeun...

N'emañ ket Breizh en Trede Bed ha n'o deus ar skouerioù-se ne-tra da welout gant hon degouezh deomp-ni. Ouzhpenn-se ez eo Breizh darn eus ar riez gall ha poellek eo e vefe kreizennet ar stlenn e Paris. Ha keulskoude... daoust ha n'eo ket unan eus labourioù pennañ an Emsav, a fell dezhañ terriñ an ereoù-sujidigezh a stag Breizh ouzh Bro-C'hall, la-kaat ar Vreizhiz da anavezout o bro, d'hec'h anavezout gant o daoulagad, d'hec'h anavezout ivez dre ar brezhoneg zoken ma'z eo dister c'hoazh niver ar vrezhonegerion ? N'omp ket aet gwall bell war an hent-se abaoe hanter-kant vloaz hag isdiorreet-meurbet eo c'hoazh an Emsav, daoust da gammedoù ramzel ar bloavezhioù diwezhañ.

DANVEZ LABOUR.

Ur vezh ruz eo evidomp-holl merzout, da skouer, n'eus levr istor ebet e brezhoneg ! Pell zo e oa embannet unan evit ar re yaouank, istor Danno, diviet abaoe pell hag embannet e vez nebeut ha nebeut gant Roparz Hemon un droidigezh (diverret) eus levr gallek La Borderie. Met e miz cost 1972, ne oamp erruet nemet e 1229 ! Ar wirionez eo e vefe ret sevel buan un dornlevr savet en ur yezh aes ha berr a-walc'h evit an holl skolidi hag emsaverion, a rank ober hiziv gant levrioù gallek, evit prientiñ an Trec'h Kentañ da skouer !

Klenn a reer alies ouzh an diouer a "voued" da reiñ d'an nevez-vrezhonegerion, er-maez eus traoù lennegel rik. Ur wech desket un tammig brezhoneg goude ur bloavezh studi, n'o deus netra da chaokaat evit kas pelloc'h o stummadur breizhat, nemet levrioù gallek. E-pad ar skolioù-hañv pe an devezhioù-studi e santer, dacust da arackadennoù bras ar bloavezhioù diwezhañ, pegen diaes eo c'hoazh kas da benn ul labour freuezhus ha padus e brehoneg. Un dornlevr istor Breizh e brezhoneg zo unan eus al labourioù mallusañ da gas da vat.

Un azon all eus hon isdiorreadur sevenadurel spontus eo an diouer a c'heriadur hollvrezhonek, da grediñ eo e chom ar galleg sichenn kement tra ha n'eo ar brezhoneg nemet un tremen-amzer. N'eus nemet an DAFAR embannet gant Preder evit bezañ tremenet hep ar galleg, met poent bras e vefe kacout ur geriadur hollvrezhonek bremañ. Setu bloavezhioù ez embanne ur paotr eus Brest edo o prientiñ unan met abaoe an amzer-se n'eo bet gwelet netra. Ret e vo sevel ivez geriadurioù divyezhek evit tremen eus ar brezhoneg da yezhoù all evel ar saozneg, an alamaneg, ar spagnoleg hag ar yezhoù keltiek. Gwir eo ez eo ar galleg yezh an darn vrasañ eus Breizhiz ha neuze ez eo talvoudus-tre ar geriadurioù brezhoneg-galleg ha galleg-brezhoneg, met ret e vo tremen dre yezhoù all evit kejañ gant ar bed-diavaez. (N'eo ket ar studierion pe ar gelennerion war ar yezhoù, dreist-holl ar saozneg, a ray diouer evit kas da benn seurt labourioù).

Isdiorreet eo ivez an Emsav war dachenn ar preder politikel hag ar preder armerzhel. Ar goull-se a glask kuzhat emsaverion 'zo gant o doareoù reut ha mont a ra ar re all da heuliañ un teod mat a zen en ur grediñ o deus levezon warnañ dre m'emañ o teskiñ ar brezhoneg ganto. Re all zo stag ouzh un den pe ouzh un nebeut gerioù-hud. Soñj an eus da

skouer eus strobiniell ar ger "diempradur" un nebeut bloavezhioù zo. Duidius eo an termen-se er gevredadoniezh evit displegañ gwikefrecù zo met ne c'hell ket bezañ ur respont hag un diskoulm da holl gudennoù an Emsav evel ma krede da emsaverion zo. Diskouez a ra kement-se gwander an Emsav war dachenn ar mennozhioù hag ar preder. Betek gouzout, n'eus bet savet studienn sirius ebet, e brezhoneg, diwar-benn armerzh pe degouezh politikel hor bro, nemet pennadoùigoù strewet amañ hag ahont war ar Vro, al Liamm Emsav, Sav Breizh, Imbourc'h, hag un nebeut kelaouennoù all. Un darvoudenn bouezus-tre eo moarvat Istor an Emsav a zo o paouez dont er-maez e levrenn-gentañ. Pa vo embannet en e bezh hor bo evit ar wech kentañ ur studienn bolitikel glok a-walc'h savet e brezhoneg; betek-hen ne oa nemet levrioù gallek, evel Fouéré, Poupinot, Caerleon, Bothorel, Martray, Phliponneau, ha tud all, oberennoù ledomsavel, rannvroel pe romantel peurliesañ... N'eo ket souezhus eta e chomfe ken nebeut a dud en Emsav eus ar re o deus kejeñ deiz pe zeiz gant an Emsav ha staget da studiañ ar brezhoneg ha danvez Breizh, zoken gant kelennerion a oa gwir vroadelourion.

Evit bezañ reizh n'heller ket tevel war an holl draoù a zo bet graet betek-hen gant an Trede Emsav, en o zouez al labour ramzel boulc'het gant Saded er bloavezhioù 60 evit degas ar brezhoneg war dachennoù nevez estreget al lennegezh hag evit lakaat an deskidi da vont en tu all eus Cours Elementaire Roparz Hemon. Hêred Saded ez eus ac'hanomp holl e doare pe zoare, zoken ar re n'o doa ket kemeret perzh en e obererezh rak kalz ledanoc'h eo bet e levezon war an Emsav. Aet eo da get siwazh an aozadur labour priziuz-se, a-benn-kaer, ha n'eo ket e 1972 evel ma c'hellfe krediñ met tri bloaz abretoc'h e gwirionez ha kement-se zo bet un doare torfed a-enep da Vreizh... Diskaredigezh Saded ne verkas ket diwezh al labour boulc'het gantañ evel-just met lemel a reas digant an emsaverion ar framm o doa ezhomm anezhañ evit kendonianñ ha steuñviñ o strivoù hag o labourioù. En un doare dizurzhiet a-walc'h ez eo bet labouret abaoe tri bloaz ha labourioù 'zo a zo chomet e foñs un diretenn dre ma ne oa aozadur ebet evit embann hag o skignañ. Dreist-holl n'eo ket bet termenet palioù ha labourioù mallusañ pezh a vefe ret pa chom ke skort niver an emsaverion ha dispignet eo bet nerzhioù hag amzer evit traoù all na oant ket moarvat ken pouezus ha mallus-se.

Poent e vefe bremañ adlakaat an traoù e e flom ha bodañ a-benn un nebeut mizhvezhioù an holl emsaverion mennet da gemer perzh en ul labour efedus ha start evit diorren an Emsav war dachennoù ar gelennadurezh hag ar preder politikel, e sell da sevel ur steuñv labour krenndermen (1973-1974-1975 da skouer). Evit ma ne chomfe ket ar vodadeg-se un emvod goulllo ha difrouezh e vefe ret he frientiñ mat dre emvodoù all dre zegas dafar ha mennozioù nevez.

E-touez al labourioù mallus da sevel ez eus, d'am meno, evel m'en eus meneget uheloc'h, un dornlevr Istor Breizh hag ur Geriadur Hollvrezhonek (ha diwezhatoc'h geriadurioù divyezhek lies-turt). Ret e vo kenderc'hel ha buanaat al labour-sevel un deskadurezh eil derez klok e brezhoneg evel ma oa bet kroget gant Saded ha kendalc'het abaoe gnat un dornad emsaverion o deus savet kentelioù gresianeg, latineg, lennegezh brezhonek, douaroniezh, istor, yezhoù hag all. Ne c'hell ket ur seurt labour bezañ didalvoud pa weler an holl vugale o tont e tiegezhioù an emsaverion. Zoken ma z'eo ret dezho mont d'ar skol c'hallek e vo talvoudus ar c'hentelioù-se evito ur pont etre o yezh-vamm hag ar skol. Aes a-walc'h eo treiñ dornlevrioù gallek e brezhoneg mat diaesoc'h eo evel-just krouiñ dornlevrioù a-ziwar-netra evel m'eo ret ober da skouer evit istor Breizh pe al lennegezh brezhonek. Arabat e vefe poaniañ evit sevel dornlevrioù pa'z eo bet graet dija al labour. Gant ar gelaouenn Skol da skouer e voe embannet a-hed ar bloavezhioù meur a dra, talvoudus c'hoazh hiziv, evel douaroniezh Breizh an Ao. Guilcher en deus ezhomm hepken bezañ kompennet un tammig.

Pa veneger an douaroniezh ez eo anat e vefe ezhomm eus ur gartennaoueg douaroniezhel brezhonek ha war he lerc'h ivez eus ur gartennaoueg istorel hag eus ur gartennaoueg armerzhel. Poent bras e vefe ivez embann kartenn Vreizh e brezhoneg. Ur gudenn wall-luziet eo rak bez e vo bepred tud evit pismigañ ha burutellañ an anvioù-lec'h-mañ-anvioù-lec'h, sturyezhourion a fello dezho da skouer distreiñ d'ar stumm kozh (evel ma rafe ar C'hallaoued gant Lugdunum e lec'h Lyon hag gant Lutecia e-lec'h Paris) e-pad ma fello da zalc'hidi ar brezhoneg poblek chom tost-tost eus ar stumm a vremañ zoken ma'z eo bet kontammet gant ar galleg (n'eus nemet soñjal en tabut a voe war Al Liamm un nebeut bloavezhioù-zo etre an Ao. AO. ar Menteg, Kervella ha Pennad a-zivout anvioù-lec'h "Bro-Ereg"). Ne ra forzh, pezh a vo embannet a vo trec'h hag a ray an unvaniezh e-touez

ar vrezhonegerion met mallus-tre eo embann ur seurt kartenn : ur reveulzi vredeniel e c'hell bezañ evit kalz ledemsaverion ha zoken emsaverion a sello ouzh Breizh da heul gant daoulagad nevez.

Evit anavezout gwelloc'h degouezh Breizh e vefe talvoudus d'am meno embann ul levrig stadegoù diwar-benn an arnezh, ar gounezerezh, ar greanterezh, ar c'henwerzh, ar boblañsouriezh, hag all... evit Breizh ha marteze ivez (en ur stumm berr) evit broioù all evit gallout keñveriañ. Stadegoù mat a bourchas an aozadur stadel gall INSEE ha n'eus nemet tenañ diouto ar stadegoù a sell ouzh kumunioù Breizh hag ouzh ar pemp departamant. Gant ur riñverez n'eo ket kalz tra d'ober met talvoudus e c'hell bezañ evit an holl emsaverion.

Gwall nebout a dra a anavez an emsaverion, nemet un dornadig anezho, diwar-benn ar broioù keltiek al ha koulskoude e sant mat an holl e vo ret startaat muioc'h-mui an darempredoù ganto. Ne vefe ket fall eta sevel levrioù diwar-benn Kembre, Iwerzhon hag Alba, en ur bouezañ war o istor ha dreist-holl istor o emsavioù broadel. Danvez-studi e c'hellfe al levrioù-se bezañ evit skolidi an deskadurezh eil derez hag evit prientiñ arnodennoù brezhonek da vezañ aozet. Diwezhatoc'h e vefe tu da sevel ivez seurt levricuigoù diwar-benn broioù all evel Euskadi da skouer.

Ul labour divent e gwirionez met pouezus-tre eo al labour treiñ. E pep bro ez eo un darn vras eus al levrioù lennet gant an annezidi levrioù troet diwar yezhoù estren. N'hell ket ur vro hiziv, dreist-holl ur vro vihan evel hon hini, em em vegañ hepken gant kenderc'h hec'h empennoù met ret eo dezhi enporzhiañ mennoziou, enporzhiañ sevenadur, da lavarout eo treiñ en he yezh oberennoù savet e saozneg, e rusianeg, e galleg, en alamaneg, h.a... war dachennoù ar politikerezh, ar brederouriezh, an armerzhouriezh, ar gevredadoniezh, hag all... Pa soñjer er milionoù a levrioù embannet abace an Azginivelezh, ez eo anat na vint morse troet e brezhoneg, dreist-holl bremañ pa'z eo ken skort niver an emsaverion. Ret e vefe ober un dibab strizh-tre eus an oberennoù pe al lodennoù-oberennoù a vefe talvoudus evit bastañ da ezhommoù an Emsav er bloavezhioù da zont an Emsav.

En ur pennad a-zivout kudenn gozh ar yezh boblek war niverenn diwezhañ Imbourc'h en deus kinniget Youenn Olier e vefe renet e Breizh un enklask diwar-benn stad an teodyezhoù brezhonek komzet hiziv war ar

maez. Ul labour pouezus-tre eo evit kadoniezh da zont an Emsav hag evit e zarempredoù gant al Tedemsvioù. Seurt labourioù-imbourc'h da sevel dindan ur bloaz pe zaou a aotrefe diazezañ labour an Emsav er bloavezhioù da zont war ur sichenn start. Tu a vefe d'ober labourioù-imbourc'h ivez war an danvezioù-mañ :

- Emzalc'hoù politikel ar Vrezhoneg. Bihan-tre eo bet betek-hen pouez ha levezon an Emsav e Breizh met kemeret perzh o deus ar Vreizhiz er c'hoari politikel gall ha talvoudus e vefe studiañ o emzalc'hoù hervez rannbarzhioù Breizh hag hervez ar bloavezhioù, dreist-holl en ur ober gant disoc'hoù an dilennadegoù (dilennadegoù evit ar c'huzulioù-kêr, evit ar c'hantonnoù, evit ar gannaded, evit al leviour gall, referendomoù, h.a...) evel m'en doa graet A. Siegfied ar c'hantved diwezhañ en e labour Tableau politique de la France de l'Ouest.

- An embann e brezhoneg (abaoe ur c'hantved pe gantoc'h hepken abaoe 1945),. Er studienn-se e vefe roet titl, danvez, niver a bajennoù, priz, niver a skouerennoù embannet, niver a skouerennoù gwerzhet, an amzer ret evit e beurwerzhañ, h.a... eus kement levr embannet e brezhoneg. Klasket e vefe ivez gwelout penaos eo bet graet ar bruderezh, penaos e voe gwerzhet al levrioù-se, gant piv int bet prenet, hag eñ int bet lennet, penaos e vefe tu da ledañ niver al lennerion, peseurt danvezioù a blij ar muiañ d'ar vrezhonegerion, h.a... Talvoudus e vefe ar studienn-se evit termenañ ur politikerezh nevez eus an embann e brezhoneg.

- Kelennadurezh ar brezhoneg, abaoe 1945. Pelec'h eo bet kelennet ar brezhoneg, gant piv, e peseurt divizoù, gant peseurt dornlevrioù, peseurt hentennoù, peseurt disoc'hoù ? Pet a skolidi a zo chomet, perak e oant deuet d'ar c'hentelioù, perak ez eo aet kuit an darn vrasañ ? Diwar ar studienn-se e vefe tu da wellaat hon doareoù d'ober ha parteze da dermenañ ur politikerezh nevez evit kelennadurezh ar brezhoneg.

- Ar feulster e Breizh. Kudenn ar feulster a sav deiz pe zeiz en un emsav-dieubiñ. Evit meizañ mat ar gudenn-se e vefe talvoudus-kenañ moarvat sevel ur studienn glok war arver ar feulster e Breizh, lakaomp, abaoe deroù ar c'hantved, ha sevel ar roll eus an holl daolioù feulster c'hoarvezet e Breizh e-keit-se (hep pouezañ re war ar brezel-bed diwezhañ a zo bet evit kalz un darvoudenn degaset eus an diavaez) : emsavadegoù ar gouerion, harzoù-labour gouez ar vicherourion evel Naoned ha Sant-Nazer, bombezennoù

Gwenn-haDu pe rouedadoù FLB, h.a... en ur glask termenañ al levezon o deus bet war an dud a-du pe a-enep. Evit kas da benn al labour-se e vo ret lenn pe gentoc'h braslenn ur bern kelaouennoù (kelaouennoù gall ha kelaouennoù an Emsav), lenn ur bern levrioù ha kejañ gant stourmerion bolitikel (em-saverion, micherourion, kouerion, h.a...)

- Ouest-France. Ur gelaouenn he deus ur pouez ponner-tre e Breizh, Ouest-France, ha pell a dreñv dezhi e chom Le Télégramme, La Liberté ha Presse-Océan. Dudius-tre e vefe studiañ istor ar gelaouenn-se, hec'h emdroadur, he doare da ginnig kudennoù Breizh hag oberennoù an Emsav d'he lennerion. (Ur studienn all a c'hellfe bezañ gouestlet d'an ORTF, skingomz ha skinwel).

- Iliz ha Breizh. Ur vro kristen e oa Breizh c'hoazh n'eus ket pell ha chom a ra an Iliz daoust d'an enkadenn c'hrevus m'emañ o tremen drezi, un nerzh bras el ledenez-mañ. Dudius e vefe studiañ emdroadur an Iliz e Breizh, he levezon er vro dec'h hag hiziv, istor he darempredoù gant an emsav broadel...

Labourioù all a vo moarvat da sevel war an tachennoù-se ha ret e vo d'an holl re o deus mennozioù o c'hinnigevit ma vint studiet ha breutaet ha lakaet war ar stern al labourioù-se an abretañ ar gwellañ. Tu a vo da sevel ivez studiennoù armerzhel war stad ar gounezerezh e Breizh, stad ar greanterezh, stad ar c'hehenterezh, h.a... ur studienn war an douristerezh e Breizh, dreist-holl e-pad ar mizioù-hañv, ur studienn war dasparzh el lu gall e Breizh, an niver a soudarded diazezet e Breizh, e levezon war vuhez armerzhel eus kêrioù zo evel Brest pe an Oriant, h.a... Stank meur-bet eo evel-just al labourioù a vefe da sevel hag e vefe ret dibab ar re vallusañ a c'hell bezañ talvoudus evit gwir evit stummadur an emsaverion, arackaat ar preder politikel en hon touez ha bruderezh an Emsav er bobl vrezhon.

N'eo ket echu c'hoazh roll ar c'hinnigoù. Un ezhomm a vez santet alies e-touez ar stourmerion bolitikel, anavezout ar framm lezennoù o deus d'ober ganto en o stourm. Talvoudus-tre e vefe embann ul levrig o tisplegañ penaos krouiñ kas en-dro ur gevredigezh (hervez lezenn 1901), ur gevredigezh a ziorreadur poblek ("d'éducation populaire"), penaos embann ha kas dre ar post ur gelaouenn, pelec'h ez eo sotreet gwerzhañ levrioù pe gelaouennoù, pelec'h e c'heller skignañ traktoù, pegañ skritelloù ? petra

ober pe vezer paket gant an archerion (diskouez a ra splann an darvoudoù n'o deus an emsaverion skiant ebet war an holl dachennoù-se), penaos kacout an actre da gelenn ar brezhoneg en ur skol c'hall, penaos aozañ un dibunadeg, penaos aozañ ur vodadeg foran, h.a...? penaos degemer skeroù digant ar c'huzulioù-kêr evit ur skol vrezhonek, h.a...?

Ur gevredigezh nevez o tiwanañ eo ivez an Emsav hag ezhommoù en devo da walc'hañ ivez war an dachenn gevredigezhel, Da skouer e kaver e pep yezh komzet ul luc'haj, gerioù all evit traoù boutin ar vuhez, gerioù evit traoù ivez na vezont ket menegot gant tud seven. Ezhommoù deus ar vrezhonegerion eus ar gerioù-se. Ijinet eo bet un nebout gerioù er bloavezhioù diwezhañ met hor mad a c'hellomp ober eus al luc'haj binvidik a oa gwechall gant ar vrezhonegerion a ziwar ar maez. Da embann e vefe (ket gant Al Liamm evel-just) ur geriadurig evit al luc'haj-se.

En ur gevredigezh n'eo ket war an oad an holl dud met bugale ez eus (hag e-touez an dud war an oad ez eus ivez tud a zo chomet yaouank-tre o zenz-spered). Ret e vefe eta sevel traoù evit ar re yaouank n'o deus evit ar mare da lenn nemet Levrioù ar Vugale aczet gant P.Denez hag embannet gant Al Liamm, Wanig ha Wenig hag ar Gevnidenn, pezh a zo gwelloc'h eget netra met un tammig skort memestra. E-touez an troidigezhioù diwar yezhoù all e vo ret mirout ul lec'h evit ar re yaouank ha treiñ oberennoù Verne, Cooper, Twain pe dud an amzer-vremañ. Ret e vefe ivez sevel levrioù e brezhoneg evito. Ret e vefe dreist-holl embann bandennoù treset e brezhoneg rak plijout a reont kalz d'an holl hag ur skoazell wirion e c'hellont bezañ evit an dud o teskiñ ar brezhoneg.

Arabat e vefe disoñjal kennebeut ar merc'hed a ya d'ober an hanter eus kevredigezh an Emsav daoust ma ne reont ket kalz a drouz c'hoazh, nemet un dornadig anezho. Ret e vefe strivañ en Emsav evit reiñ dezho, muioc'h a bouez hag a giriegezhioù, evel ma c'hoarvezh e broioù all. Talvoudus e vefe embann pennadoù pe levrioù diwar-benn an doare da sevel ur c'hrouadur, da zesevel bugale, embann ivez levrioù-kegin e brezhoneg (ken talvoudus e vefe evit ar baotred hag ar merc'hed !) evit hol lakaat da adzizoleiñ ar c'heginañ breizhat ha dizoleiñ neudoù saourus broioù all...

Bepred evit kevredigezh an Emsav e vefe dudius sevel levriouigoù-beaj. Emaomp o vont war-du "sevenadur an diduelloù", evel-just vakañsoù un emsaver a dremen peurliesañ ouzh e daol-labour pe e devezhioù-studi met

ret eo ivez evit holl izili an tiegezh mont da avelañ o fennoù ur wech an an amzer : evito e vefe mat aozañ levrioù-stur evit gweladenniñ Breizh, ar broioù keltiek ha broioù all. Souezhus eo gwelout pegen nebeut ha pegen fall ez anavez ar Vreizhiz o bro dezho, hep menegiñ an holl lec'hioù na vezont ket meneget el levrioù gall hag o deus avat ur bouez bras en hon istor evel emgannlec'h Balon, emgannlec'h Sant Albin, leurenn Bouffay e Naoned, traezhenn Sant-Kast, hag all ... N'eo ket ar vakañsoù hiziv un dra evit mondianed; dizoleiñ Breizh ha broioù all gant ur marc'hhouarn hag un deltenn da skouer ne goust ket ker. Un ezhomm eo deuet da vezañ muioc'h mui gant ar vuhez droch a renomper c'hoededoù bras. Setu perak en devo ivez an Emsav da brederiañ war gudenn ar vakañsoù en doare ma vo pinvidikaet c'hoaz ganto an Emsav.

Emaomp o pellaat marteze eus kudennoù pleustrek ar stourm politikel met n'eo ket ken pell-se an holl draoù-se eus ezhomm gwirion an Emsav, an Emsav gwelet evel kevredigezh. Ret e vefe dezhañ plediñ ivez gant kudenn an arz. E meur a vro en deus ar spered broadel en em ziskouezet ivez dre an arz hag en deus skoazellet ar bobl da zizoleiñ teñzorioù he broadelezh. Un darvoudenn emdarzhek eo eveljust an arz met skoazellet hag atizet e c'hell bezañ gant ar gevredigezh. Gwelout a reomp c'hoazh o tiwanañ kanerion-bobl ganto ur spered broadel gwirion met war dachennoù all evel an tre sañ pe ar c'hizellañ ez'eo skort c'hoazh niver an arzourion awenet diouzh istor ha broadelezh Breizh, evel ma voent ar "Seiz Breur" da vare an eil Emsav. Ec'hon eo avat an dachenn labour evit an arzourion e Breizh pa vez lakaet muioc'h-mui ene hor bro en arvar gant ur sevenadur untonha dic'h-wek alies (gwelout an tisaverezh da skouer). Meneget eo bet dija ar bandennoù treset, treserion all a c'hell skeudenniñ hon dornlevrioù ha kinklañ lec'hioù-emvod an emsaverion, kizellerion a c'hell orientiñ an delwenoù broadel a vo da sevel e Breizh (evel ma reas Raffig Tullou e Baen-Balon), sonerion a c'hell aozañ tonioù ha kanaouennoù broadel, an dud barrek evit sevel filmoù a c'hell lakaat o donezonoù e gourc'hemenn an Emsav. Gouzout a reer ez eus abaoe un nebeut bloavezhioù e Kornogeuropa hag e Norzamerika filmoù "underground" (dirgel) niverus-tre a vez graet ha diskouezet er-maez eus an amredadoù kenwerzhel, peurliesañ e "super 8" pezh n'eo ket ken ker hag ar filmoù 16 mm. Perak ne vefe ket graet ivez filmouigoù evel-se diwar-benn stourm an Emsav ha stourm ar bobl vrezhon, filmoù

hag a c'hellfe bezañ diskouezet dre ar vro e-kerz emvodoù, enno ugent pe dregont arvester d'ar muiañ ? Hep mont ken pell ez eus tu d'ober gant luc'hvannoù ("slides" e saozneg) hag un tonenroller un arvest plijus-kenañ evit brudañ pennozioù an Emsav pe lakaat an dud da anavezout gwelloc'h ur bajenn eus istor o bro.

Ur bern traoù all a c'heller ijinañ. Lakait eta hoc'h ijin da labourat ha kinnigit d'an Emsav he kavadennoù. Beont eo mont war-raok. Labour a vo evit pep hini. Ne c'heller ket uni koll amzer pep hini diouzh e du, ret eo labourat a-stroll, hervez ur steuñv labour divizet a-stroll. Bec'h d'al labour eta !

-----<
An arzourion a c'hello pleustriañ war rakskouerieoù skritelloù (politikel rik pe evit bruderezh an dra-mañ-tra : kentelioù brezhonek, gouelioù...)

Tresañ a c'hellfent poltredoù bras eus harozed Breizh pe ar broioù keltiek e doare ar "posters".

=====

K E L E I E R L I E S S E U R T

E c ' h w e l o ù e B r e i z h

Da zibenn miz Here edo o kenderc'hel daou ec'hwel hir e Breizh, hini micherourion ar c'haolin e Plemet abaoe pemp sizhunvezh, hini 45 micherour e labouradeg Big Dutchman (kevredad izelvroat) e Sant-Karreug abaoe seizh sizhunvezh.

R e f e r e n d o m e S u - I w e r z h o n

E miz Kerzu e vo aozet ur referendom e Republik Iwerzhon evit diskenn an oad-mouezhiañ da 18 vloaz (evel m'eo bet graet dija e kalz riezoù ar c'hornog er bloavezhioù diwezhañ) ha dreist-holl evit kempenn ar vellad 44 eus ar vonreizh a-zivout an darempredoù etre ar Stad hag an Iliz. Lamet e vefe ar frazenn-mañ : "Anavezout a ra ar Stad dezvad a-ziforc'h an Iliz katolik santel romat evel difennourez eus ar feiz diskleriet gant an darn vuiañ eus ar geodedourion."

Ur skoilh eo ar frazenn-mañ evit adunanidigezh ar vroad iwerzhonat dre maz a ar Brotestanted d'ober an niver brasañ eus annezidi Norzh-Iwerzhon. Zoken ma vez lamet ar frazenn-mañ diouzh ar vonreizh e chomo daou skoilh all : berzet e vez er Republik iwerzhonat an torr-dimeziñ ha gwerzh ar c'henderc'hadoù-hilastaliñ, pezh a zo aotreet er Rouantelezh-Unanet".

R e f e r e n d o m e N o r z h I w e r z h o n

D'ar 6 a viz Kerzu e tle bezañ aozet e Norzh-Iwerzhon dilennadegoù lec'hel gant ar c'hannaderezh kenfeurel (un den, ur vouezh) evit ar wech kentañ eno, evel ma vez goulennet abaoe bloavezhioù gant Iwerzhoniz. E Dirak enebadur taer an Unanourion en deus kilet ar gouarnamant saoz hag ampellet an dilennadegoù-se o dije roet d'ar bihanniver an tu d'en em eztaoliñ evit ar wech kentañ.

A-benn pevar mizvezh avat e vo aozet e Norzh-Iwerzhon ur referendom a-zivout adunvanidigezh an enezenn. Evel m'eo bet bet merket gant gouarnamant Dulenn kerkoulz ha gant ar vroadélourion iwerzhonat n'eus talvoudegezh ebet gant ur referendom a seurt se ma ne c'houlenner ket o zli war un dro gant holl annezidi an enezenn.

S K O L - V E U R A N N A O N E D

E deroù ar bloavezh-skol 1972-1973 o deus en em enskrivet 16.500 studier e Skol-veur an Naoned, un darn vras anezho o vezañ Gallaoued o tont eus departamantoù nes met un darn vras all o vezañ Breizhiz. E 1963-1964 ne oa nemet 8.100 studier en Naoned ; 15.000 a oa e 1969 e 1970 ha 16.900 e 1971-1972. Kresket en deus kalz eta niver ar studierion e kêr vrasañ hor bro abaoe dek vloaz met stabil eo deuet da vezañ bremañ.

Setu penaos e oa dasparzhet ar studierion warlene e Skol-veur an Naoned :

Lizhiri	4.600	Apotikouriezh	646
Skiantoù	2.300	I.U.T. + St-Nazer	951
Gwiraouriezh		Dentmezegiezh	396
& Armerzhouriezh	2.200	h.a.	
Mezegiezh	2.400		

A n d i l e n n e r i o n e B r e i z h

Dilennadegoù gall a vo aozet e miz Meurzh 1973. Daoust ma ne gemero ket perzh enno an emsaverion ne c'hellont ket chom diseblant ouzh an darvoudenn-se ha kentelioù o devo moarvat da denañ diouzh an disoc'hoù anezho. Heuliañ a raint moarvat strivoù al ledemsavioù evit kinnig danvez-kannaded. Emañ e soñj an U.D.B. kinnig un nebeut anezho o klask en em glevout gant strolladoù kleizat gall hag embann a ra "Strollad ar Vro" abaoe meur a sizhunvezh e kinnigo danvez kannaded e pep kelc'hparzh eus Breizh. Arc'hant en deus kavet al luskad-se, war a seblant, evit kellidañ bruderezh e zanvez-kannaded met ne weler ket mat da belec'h e tisoc'ho seurtstrivoù, ken amjestr eo o roll-labour ha ken disheñvel an eil diouzh egile an danvez kannaded. Pa soñjer e c'hwitadenn al ledemsaverion en dilennadegoù diwezhañ dindan ar skritell "Front breton" e c'heller en em c'houlenn hag-eñ n'eo ket noazus evit an Emsav seurt strivoù. Evit ar c'hedveno e Breizh hag en diavaez e vo diskouezet c'hwitadenn al ledemsaverion evel ur brouenn ouzhpenn n'en deus an Emsav gwrizienn ebet er bobl vrezhon ha, - pezh a zo gwashoc'h - tennet e vo korvo eus forc'hellegezh ha dislavaroù an danvez-kannaded evit divrudañ ar muiañ ma vo tu ar c'heal broadel e Breizh. Rediet e vo an Emsav eta an Emsav da embann ez foran e savboent e-keñver an devoudoù-se.

A-hend-all e vo deurus evezhiañ ouzh emdroadur ar Vrezhoned e-keñver kostezennoù ar vuhez politikel gall, dreist-holl goude marv ar jeneral De Gaulle a oa bras e vrud e Breizh. Pa seller ouzh ar stadegoù e verzer ez eo kalz

niverusoc'h ar merc'hed eget ar baotred e-touez an dilennerion vreizhat. Setu penaos e oa dasparzhet an dilennerion enskrivet er marilhoù-mouezhiañ d'an 28 a viz c'hwevrer 1970 :

Departamant	Gwazed	merc'hed	hollad
22	148 334	166 106	314 440
29	237 038	265 790	502 828
35	184 081	212 771	396 852
44	239 267	271 483	510 750
56	161 817	178 749	340 566
BREIZH	970 537	1 094 899	2 065 436

Y u n o ù p o l i t i k e l e n E u s k a d i

Evit enebañ ouzh argasidigezh Euskariz diouzh o bro (c'hwezek den abaoe ar 6 a viz Here 1972) o deus kroget pevar broadelour yaouank euskarat da yunañ en Iliz-veur Bayonne. Goude 16 devezh yun e voe ret kas anezho d'an ospital met 46 euskarad all o deus kemeret o lec'h en Iliz-veur.

D'ar 27 a viz Here e voent argadet gant ar gerreizh c'hall deuet evit pakañ un emsaver eus Su-Euskadi, Julen K. de Madariaga (39 vloaz ha pemp bugel dezhañ). Heverk tre eo istor ar broadelour-mañ : gant broadelourion all e krouas e 1953 al luskad EKIN (=derc'hel) a ziwanas diwezhatoc'h dioutañ an aozadur dispac'hel ETA e 1959. Rediet da guitaat Su-Euskadi e voe kendaonet e miz c'hwevrer gant ul lez-varn c'hall evit derc'hel armoù en e gerz. E 1970 e voe berzet outañ chom e 12 departamant (en o zouez Norzh-Euskadi, eveljust). Dre ma oa un den pennek anezhañ e chomas en e vro hag e miz Gouere 1971 e voe paket gant ar gerreizh c'hall hag ambrouget betek Belgia. Dont a reas endro da Euskadi e miz C'hwevrer 1972 met tapet e voe adarre gant ar gerreizh c'hall ha lakaet er c'harr-nij kentañ a skoe war-du Chile (keodedour chileat eo an Euskarad-mañ). E miz Here e oa distroet d'e vro.

E-pad arsailh ar gerreizh (gant greunadennoù-daeraouiñ e diabarzh an Iliz-veur!) e kanas ar vroadelourion ar ganaouenn dispac'hel "Eusko gudariak gera" ("Ni zo ar stourmerion euskarat). Ret e voe d'ar boliserion c'hall degas ur jubennour evit marc'hata gant ar vroadelourion abarzh ma asantas Julen K. de Madariaga en em zaskoriñ d'ar gerreizh c'hall.

Kalz tud en Euskadi, tud ha n'int ket broadelourion zoken, a zo savet droug enno dirak emzalc'h ar gouarnamant gall a nac'h ouzh Euskariz ar gwir da vevañ en o bro hag a genlabour ent digor gantgouarnamant faskour Madrid. D'an 8 a viz Here, da skouer, ez eo bet berzet e Frañs an oozadur dispac'hel ETA. Kevratoù kenwerzhel arc'hantus en deus bet moarvat ar gouarnamant gall en eskemm eus e genlabour evit heskinañ ar vroadelourion euskarat. N'eo ket eeun tamm ebet eta al leviour gall Pompidou pa zisklerie un nebeut sizhunvezhioù zo "e savfe gouarnamant Paris a-enep da emezelidigezh Spagn er C'henvarc'had keit ha ma chomfe ganti ar gouarnamant he deus evit ar mare."

Da heul arsailh ar polis en Iliz-veur Bayonne o deus dibunet daou vil den e straedoù ar geoded-se evit diskouez o eneberezh ouzh ar seurt emzalc'h. En em ledet eo ar yunoù dre Norzh-Euskadi e deizioù diwezhañ miz Here. D'an 29 a viz Here e oa broadelourion o yuniñ e Biarritz, Saint-Jean-de-Luz, Ustaritz, Hendaye, Mauléon, Saint-Palais, Socoa, ha Bayonne-Saint-André, en holl, gant yunerion an iliz-veur hogos seikont den. Dont a rae ar boblañs d'o gweladenniñ ha da reiñ dezho testeni eus o c'hengred.

D i s p a c ' h e r i o n v r e z h o n e n I w e r z h o n

Hervez al luskad dispac'hel iwerzhonat "Saor Eire" ("Iwerzhon Dieub") e vije aet da Iwerzhon er sizhunvezhioù diwezhañ 16 ezel eus an Talbenn-dieubiñ breizhat evit en em c'hourdoniñ e kampoù kuzh an oozadur. Aet e vije an dispac'herion vrezhon-se da Iwerzhon a-nebeudoù evit tremen hep dedennañ evezh nag hini ar pennadurezhioù iwerzhonat hag hag en em dremenet o dije da studierion deuet da studiañ en Iwerzhon. Roet en dije al luskad iwerzhonat dezho armoù da embreger e sell d'o stourm da zont.

Souezhus a-walc'h eo seurt keleier ha ret eo d'an emsaverion chom war evezh rak n'eo ket ar wech kentañ ez eus istrogelled evit skignañ hevelep sorc'hennoù. Da goulz an TDB kentañ e komze Yann Goulet a sevel "ur gouarnamant breizhat en harlu" hervez ar gelaouennerion c'hall da vihanañ. Istrogelled ha speredoù romantel hepken a c'hell bezañ trevariet en doare-se. N'eo ket erruet c'hoazh an Emsav, pell emañ zoken, e mare ar stourm armet.

=====

D I F F L O U

G E N E L I E Z H U R C ' H O M U N O U R

("B u h e z s k r i d M a o - T s e - T o n g)

T r o e t g a n t Y a n n M o r v a n

B L E N L A V A R

Kenderc'hel a reomp da embann buhezskrid Mao-Tse-Tong a zo un danvez dedennus evit studiañ dre vras doareoù ur stourm politikel a zo pell bras diouzh hon hini hogen a ziskouez pebezh perzhioù a rank kaout ar re a zo mennet da gemer ar galloud en ur vroad bennak.

Lvel broad moarvat n'he deus Sina netra da zeskiñ deomp. N'eus keñver ebet etre Sina ha Breizh, se zo sklaer. Bez e c'hell stourmerion varksat e Breizh kemer ar vroad sinaat da vroad-vlegn ar stourm a-enep d'an impalaerelouriezh, Ha, sur-awalc'h, n'he deus ket klasket Sina, war a seblant, luziañ ar broioù a vez harpet ganti ebarzh ereoù marc'hadou mac'homus, evel ma vez gourdon d'ober an Amerikaned pe Soviediz pe n'eus forzh peseurt broad pe riez dezhi un tamm galloud armerzhel ha politikel.

Lavarout a rankfed, da gentañ, padal, ne ra vertuz Sina en degouezh-mañ nemet eztaoliñ he saviad politikel gwirion ; n'eo ket bras a-walc'h galloud armerzhel ha milourel Sina evit aotren dezhi ren ur politikerezh impalaerelour ; hag an darvoudoù diwezhañ - hec'h emglev gantan U.S.A.-a ziskouez eo prest d'en em glevout gant an impalaerelourion evit diogeliñ he mad-hi da gentañ.

Hogen dre he ment end-eeun, a adlavaromp, n'eus keñver ebet etre Sina ha broadoù bihan a seurt gant hon hini hag anat eo ne c'hellfe ket ar riezoù bihan a c'houlennfe sikour Sina bezañ dieub en he c'heñver adal m'o defe ezhomm eus ar sikour-se end-eeun.

Sina e gwirionez a zo heñvel ouzh pezh e vije bet Europa ma ne vije ket bet distrujet ha bruzhunet an impalaeriezh roman ha ma vije bet miret al latin da yezh sevenadur abaoe an henamzer. Gouzout a reer ez eo manet ar sinaeg skrivet heñvel ouzh pezh e oa daou vil vloaz zo tra maz eo emdroet ar yezh komzet betek disoc'hañ da veur a yezh ken diforc'h an eil diouzh eben hag an italianeg pear galleg.

N'eus muzul boutin ebet eta etre ar pezh a zo bet sevenet e Sina gant Mao-Tse-Tong hag ar pezh a fell deomp krouiñ en hor rannved-ni hag a denn da vruzhunañ ha da lec'helaat ar galloud politikel ar muiañ ar gwellañ evit reiñ ar muiañ a intrudu hag a frankiz posupl d'an hinienn war an dachenn. Dre se n'eo ket eus ur Mao - tonket dezhañ dont da vezañ un doue en abeg d'ur galloud politikel kement hag hini an impalaered roman a wechall - hon eus ezhomm hogen eus miliadoù ha kantmiliadoù a geodedourion emskiantek gouest da vleniañ o broadoù hep kaout dober a vlenier meur ebet.

DEVEZHIOU E CHANGHA (Kendalc'h)

Em skouadrenn e oa ur mengleuzier eus Hunan hag ur gov a blije din kalz. Didalvoud e oa ar re all hag unan anezho a oa un hailhon. Kendrec'hiñ a ris daou studier ouzhpenn da zont el lu ha mignon e teuis da vezañ gant penn an duilhad ha gant an darn-vrasañ eus ar soudarded. Gouest e oan da skrivañ ; anavezout a raen traoù diwar-benn al levrioù ha doujet e veze ganto va "deskadurezh vras". Dre skrivañ lizhiri evito pe dre zoareoù heñvel ouzh hemañ e c'hellen o skoazellañ.

Ne oa ket termenet c'hoazh disoc'h an dispac'h. N'o doa ket ar re Ch'Ing dilezet c'hoazh ar galloud evit mat hag ur stourm a-ziabarzh a oa er C'houomingtan a-zivout ar renerezh. E Hunan e veze lavaret e oa unket ar brezel da genderc'hel. Savet e oa bet meur a arme a-enep d'ar Vandchoued ha da Youan-Chih-k'ai (1). En o zouez e oa arme Hunan. Met dres p'edo Hunaniz war-nes mont d'ar stourm e teuas Sun-Yat-Sen ha Youan-Chik-K'ai d'en em glevout hag arsav a reas ar brezel ; unvanet e voe an Norzh hag ar Su ha divodet gouarnamant Nanking. O soñjal e oa echu an dispac'h e rois va dilez eus an arme hag e tivizis distreiñ d'al levrioù. Soudard e oan bet e-pad un hanter vloaz.

Stagañ a ris da lenn bruderezhioù er c'helaouennoù. Kalz skolioù a oa bet digoret d'an ampoent-se ha gant an doare-se e raent evit dedennañ studierion nevez. N'em boa merk-barn ebet evit dibab etre ar skolioù. Ne ouien ket ez resis pezh a felle din ober. Trellet e voen gant ur bruderezh evit ur skol bolis ha lakaat a ris va anv evit mont enni. A-raok tremen an arnodenn avat e lennis ur pennad bruderezh evit ur "skol" o kenderc'hañ soavon. Me oa goulennet skodenn ebet ; lojet e oad ha prometet e oa ur gopr bihan. Ur bruderezh awenus ha dedennus e oa. Komz a rae euc perzhioù-mat ar c'henderc'h soavon evit ar gevredigezh ha displegañ a rae penaos e pinvidikafe ar vro hag e pinvidikafe an dud. Kemm a ris va mennoz hag e tivizis dont da vezañ kenderc'her soavon. Paeañ a ris un dolar aze evit ar gwirioù-enrollañ.

E-keit-se e oa deuet ur mignon din da vezañ studier war ar

(1) Diwezhatoc'h e teuas Youan da vezañ leviour Sina hag e 1915 e klaskas dont da vezañ impalaer.

gwir ha derc'hel a rae warnon evit va lakaat da zont en e skol. Lennet em boa ivez ur pennad tarañverezh hoalus evit ar skol-se a bromete ivez ober bruzhudoù e-leizh ; grataat a rae kelenn d'ar studierion kement tr a oa diwar-benn ar gwir en ur ober tri bloaz ha goude ar prantad-se e roe da wir e teufe ar studierion kerkent da vezañ mandarined. Ne baoueze ket va mignon a ganmeuliñ ar skol-se ha setu ma skrivis d'am ziegezh en dibenn evit adlavarout kement a oa prometet gant ar skol-se hag evit goulenn diganto kas din gwerzh ar skodenn-enrollañ evit ar skol. Evito e livis un daolenn skedus eus va buhez da zont evel gwiraour ha mandarin. Taeañ a ris neuze un dolar evit lakaat va anv er skol-wiraouriezh-se ha me da c'hortoz respont va zud.

Adarre en em ziskouezas an tonkadur e stumm ur pennad bruderezh evit ur skol-gwenwerzh. Displegañ a reas ur c'heneil all edo ar vro en ur brezel armerzhel hag e oa eus armerzhourion e oa ar muiañ ezhomme evit adsevel ar vro. Trec'h e voe an arguzenn-se hag e tispignis un dolar c'hoazh evit lakaat va anv er skol-genwerzh-se. En em enskrivañ a ris eno evit mat ha degemeret e voen. E-keit-se avat e kendalc'his da lenn pennadoù bruderezh hag un deiz e lenni unan o tisplegañ perzhioù-mat ur skol-genwerzh stadel uhel. Meret e oa gant ar gouarnamant ha kinnig a rae un deskadurezh ledan. Goude klevout e oa tud barrek tre eus ar gelennerion e tivizis e oa gwell-oc'h bezañ un arbennigour war ar c'henwerzh ; paeañ a ris adarre un dolar evit lakaat va anv el levr-enrollañ. Da heul e skrivis d'am zad diwar-benn va mennoz. Plijet e voe. Stad a-walc'h a rae eus perzhioù-mat ur c'henwerzhour ampart. Mont a ris d'ar skol-se ha chom enni ... ur mizvezh.

Dizoleiñ a ris e oa ur gudenn gant va skol nevez : e saozneg e veze graet an darn-vuiañ eus ar c'hentelioù hag evel studierion all n'anavezen ket kalz a dra e saozneg, en tu-hont d'al lizherenneg. Ouzhpenn-se ne bourchase ar skol kelenner ebet war ar saozneg. Digalonekaet gant an degouezh-se e tilezis an ensavadur e dibenn ar miz hag e kendalc'his da lenn ar pennadoù bruderezh er c'hazetennoù.

Er gentañ skol Etre rannvroel ez is da heuliañ kentelioù a-benn ar fin. En em enskrivañ a ris adarre evit un dolar, tremen an

arnodenn-degemer ha degemeret e voen ar c'hentañ war roll an arnodennidi. Ur skol vras e oa, kalz studierion enni ha desket bras ar gelennerion. Ur c'helenner sinaek am skoazellas kalz eno : dedennet e oa ganin en arbenn a'm zechoù lennegel. Prestañ a reas din ar c'helenner-se ul levr anvet : Darvoudennadurioù gant ad-displegoù impalaeriezhel (YU P'i T'oung Chien) a oa ennañ reoliadurioù impalaeriezhel hag abegadennoù gant Ch'ien Loung.

En amzer-se e tarzhas ur boultrezhez eus ar gouarnamant e Changsha. Un tangwall ramzel e voe ha dudius e voe kavet ganeomp studierion. Tonennadoù a volodoù hag a obuzioù a strakz ha mont a reas ar poultr d'ober ur flamm bras spontus. Gwelloc'h e oa eget un tan-arvest. War-dro ur mizvezh goude e voe kaset T'an Yen-k'ai gant Youan Shih-k'ai a reole bremañ ardivink politikel ar republik. T'ang Hsiang-ming a gemeras lec'h T'an Yen-k'ai ha stagañ a reas d'ober difraeoù e sell da gadaridigezh Youan.

Ne blijete ket din ar gentañ Skol-etre. Bevennet e oa an dachenn-studi ha strizh he reolennadurioù. Goude bezañ lennet an Darvoudennadurioù gant ad-displegoù impalaeriezhel e oan deuet d'an disentez e vije gwelloc'h evidon lenn ha studia va unan penn. Goude c'hwec'h mizvezh e tilezis ar skol hag e savis ur steuñv-deskadurezh evidon va unan, a c'hoarveze eus mont da lenn bemdez e Levraoueg Rannvroel Hunan. Reoliek ha damantus tre e voen evit heuliañ ar steuñv-se hag an hanter-vloaz a dremenis en doare-se a voe talvoudus meurbet din, war va meno. D'al levraoueg ez aen diouzh ar beure pa veze digoret. Da greisteiz ne baouezen nemet an amzer da bremañ ha da zebriñ div wastell-riz a yae d'ober va lein pemdeziek. El levraoueg e chomen betek ma veze klozet.

E-kerzh an amzer-se a emgelenne e lennis kalz levrioù ha studiañ a ris douaroniezh ar bed hag istor ar bed. Eno, evit ar wech kentañ e welis gant kalz dudi ur gartenn eus ar bed. Lenn a ris Pinvidigezhioù ar broioù gant Adam Smith, Orin ar rummoù gant Darwin hag ul levr diwar-benn ar vuhezgezh gant John Stuart Mill. Lenn a ris oberennoù Rousseau, Reizhvezaderezh gant Spencer hag ul levr gwiraouriezh skrivet gant Montesquieu. Kejañ a nis gant barzhoniezh, romantoù hag istorioù Hellaz kozh ha gant studi sirius eus istor

ha douaroniezh Rusia, Amerika, Bro-Saoz, Bro-C'hall ha broioù all.

Edon o vevañ neuze e ti ur vreuriezh evit an dud genidik eus korn-bro Hsiang-Hsiang. Eno e oa ivez kalz soudarded war o leve pe tud disoudardet eus va c'horn-bro ha n'o doa labour ebet ha nebeut a arc'hant. O tabutal e veze bepred ar studierion hag ar soudarded e ti ar vreuriezh hag ur wech, diouzh an noz, e troas an enebadur-se etrezo da feulster gwirion. Ar soudarded a dagas ar studierion hag a glaskas o lazhañ. Tec'hout a ris d'en em guzhat er privezioù e-lec'h ma chomis betek dibenn ar c'hrogad.

N'em boa arc'hant ebet d'an ampoent-se o vezañ ma nac'he va zud va bevañ dre ma ne oan ket enskrivet en ur skol. Dic'hallus ma oa din kenderc'hel da vevañ e ti ar vreuriezh e stagis da glask ul lec'h all evit chom. E-keit-se em boa prederiet a-zevri diwar-benn va "red-buhez" ha divizet em boa e tere ar gwellañ ouzhin bezañ kelenner. Staget em boa da lenn adarre ar bruderezhioù. Dedennet e voe va selloù gant ur bruderezh hoalus evit skol-vistri Hunan ha gant deur bras e cuezis he ferzhioù-mat : netra da baeañ evit ar c'hentelioù, bevañ ha lojañ marc'had-mat. Daou vignon din a boueze warnon evit maz afen enni. Va skoazell a c'hoantaent evit prientiñ al labour da vezañ degemeret enni. Kemenn a ris dre lizher va mennad d'am zud ha degemer a ris o asant. Sevel a ris labourioù evit va daou vignon hag unan all evidon. Degemeret e voemp hon tri, pezh a dalv voen degemeret teir gwech e gwirionez. Ne gave ket din d'ar mare-se e oa direizh bezañ graet al labour-se e-lec'h va mignoned : ne oa nemet un afer a vignoniezh.

E-pad pemp bloaz e voen studier er skol-vistri ha dont a ris a-benn da herzel ouzh hoalerezh an holl vruderezhioù war-lerc'h. En dibenn e tapis va skrid-testeni evit mat. Meur a zarvoudenn a c'hoarvezas e-pad m'edon o vevañ eno, e kentañ skol-vistri rannvroel Hunan rak e-doug ar prantad-se e kemeras stumm va mennozioù politikel. Eno ivez e prenis skiant evit ar wech kentañ eus an ober kevredigezhel.

Em skol nevez e oa kalz reolennadurioù ha ne oan a-du nemet gant nebeut tre anezho. Enebe e oan, da skouer, ouzh ar c'hentelioù ret war ar skiantoù naturel. Fellout a rae din en em arbennikat war

ar skiantoù kevredigezhel. Ne oan ket dedennet gant an darn-vrasañ eus ar c'hentelioù-se. Kasoni a vagen a-us da bep tra ouzh ar rummad kentelioù rediek diwar-benn an tresañ traoù divuhez. Amoet kenañ e oa kement-se, d'am soñj. Boaziet e oan da glask an traoù eeunañ da dresañ e sell da echuiñ buan ha da vont kuit er-maez eus ar c'hlas. Soñj am eus bezañ treset un deiz un "hanter-heol, hanter-roc'h" (1) egiz ul linenn gant un hanter-gelc'h dreist dezhi. Ur wech all e-pad un arnodenn war an tresañ e voe a-walc'h din tresañ un hirgelc'h. Lavarout a ris e oa ur vi. N'em boe nemet 40 war an tresañ ha c'hwitañ a ris. Gwell a se evidon e oa mat kenañ va notennoù er skiantoù kevredigezhel ha kempouezañ a raent va notennoù fall er rummadoù kentelioù all.

Ur c'helenner sinaek, lesanvet "Youan Barvek" a rae goap eno ouzh va skridoù hag a rae anezho labour ur c'helaouenner. Dismegañsiñ a rae Liang Ch'i-Ch'ao a oa bet va skouer hag e selle outañ evel un den damzesket hepken. Ret e voe din kemm va stumm-skrivañ. Studiañ a ris skridoù Han Yü ken e teuis a-benn da vestroniañ ar frazennadurezh klasel kozh. A-drugarez da Youan Barvek e c'hellan c'hoazh hiziv sevel un danevell en ur stumm klasel dereat diouzh ret.

Ar c'helenner am levezonas ar muiañ avat a voe Yang Chen-Ch'i bet o studiañ e Bro-Saoz. Kelenner e oa war ar vuhezegezh ha bez e oa anezhañ un hollsperedour hag un den a benn, reizh ha leal. Kredañ a rae start tre en e vuhezegezh ha klask leuniañ e studierion gant ar c'hoant da vezañ tud reizh, leal ha dellidus, talvoudus evit ar gevredigezh. Dindan e levezon e lennis ul levr buhezegezh troet gant Ts'ai Youan-p'ei hag awenet e voen evit skrivañ ur pennad dezhañ an titl : "Nerzh ar spered". D'ar poent-se e oan un hollsperedour ha prizet e voe va fennad gant ar c'helenner Yang-Chen-ch'i, diouzh e savboent a hollsperedelour. An notenn 100 a roas din evitañ.

Boaz e oa ur c'helenner all, T'ang e anv, da reiñ din skouerennoù eus "Kelaouenn ar Bobl" ("Min Pao") ha gant kalz dudi e lennen anezho ; enno e kavis pennadoù diwar-benn obererezhioù ha roll-labour an "Toung Meng Houi" (2). Un deiz e lennis un niverenn

(1) Hervez ul linenn eus ur varzhoneg brudet gant Li T'ai-po. (2) An Toung Meng Houi a oa ur gevredigezh kuzh ha dispac'hel bet krouet gant an Dr. Sun Yat Sen a-raok dezhañ sevel ar c'houomingtan. Un darn vras eus e izili a oa Sinaiz divroet da Japan e-lec'h ma renent ur stourm nerzhus evit diskar renerion ar strollad "unpennour-kempennet".

eus "Min pao", enni istor daou studier sinaat a oa bet o veajiñ dre Sina ha tizhet ganto Tatsienlou, war harzoù Tibet. Broudet e voe kalz va faltazi gant ar skrid-se. Fellout a rae din heuliañ o skouer ; met n'em boa ket arc'hant ha kavout a rae din e oa ret din da gentañ klask beajiñ dre Hunan.

An hañv war-lerc'h e tivizis treuziñ ar ranndir-se war droad ha me da veajiñ dre ar pemp kontelezh-se hep dispign ur gweneg toull. Gant mignoned en em gaven ha maget e vezemp gant ar gouerion a roe deomp bod evit an noz ; e kement lec'h ma tremenjomp e voemp degemeret mat. Ar c'henstudier-se, Hsia YU ma voen o veajiñ gantañ, a zeuas diwezhatoc'h da vezañ un amaezhiad eus ar C'houomingtang e Nanking dindan Yi Pei-Chi a oa d'ar mare-se levier skol-vistri Hunan. Un amaezhiad uhel e teuas Yi Pei-Chi da vezañ e Nanking hag ober a reas diouzh lakaat envel Hsiao Yü da evezhiad emirdi Palez Peking. Darn eus talvoudusañ teñzorioù ar mirdi a werzhas Hsiao Yü hag e 1934 ez eas a-ziwar wel gant an arc'hant.

Evidon da vezañ lavariant ha da santout ezhomm da gaout un nebeut mignoned tost din e lakais ur pennad bruderezh en ur gelaouenn eus Changsha o kinnig da dud yaouank dedennet gant al labour evit ar vro kejout ganin. Resizañ a raen : yaouankizoù kalet, dezho un tamm mat a youl ha prest da ober aberzhioù evit o bro. Da heul ar bruderezh-se e tegemeris tri respont hanter. Unan anezho a oa digant Liou Chiang-Loung a enezelas diwezhatoc'h er Strollad Komunour hag a drubardas anezhañ da c'houde. Daou all a oa digant tud yaouank a zeuas da vezañ kilstourmerion douet diwezhatoc'h. Dont a reas an hanter-respont eus ur paotr yaouank na felle ket dezhañ emouestlañ, Li Li-san e anv (1). Li a selaoue kement am boa da lavarout ha neuze ez ae kuit hep kinnig netra resis e-unan ha morse ne savas mignoniezh etrezomp.

Tamm ha tamm avat e tastumis endro din ur bodad studierion hag an dibab anezho a yeas a-c'houdevezh d'ober ur gevredigezh : Hsin Min Hstieh Houi - a oa tonket dezhi kaout ul levezon don war aferioù ha dazont fina. Ur strolladig tud, dezho mennozioù sirius, e

(1) Li Li-San a a voe kiriek diwezhatoc'h d'al linenn bolitikel Li Li-San ma enebas Mao-Tse-Tong groñs outi. Pelloc'h e komzo Mao eus stourm Li a-enep d'an arme ruz hag eus e zisoc'h.

oa ha n'o doa ket an izili anezhañ amzer da goll gant breutadegoù difrouezh . Ur pal a zlee bezañ gant kement tra a raent pe a lavarent. N'o doa ket amzer da zioueriñ evit ar garantez pe ar romantegzh ha kavout a rae dezho e oa re arvarus an degouezh politikel ha re vallus an ezhomm deskiñ evit kaozeal diwar-benn ar merc'hed ha kudennoù personel. Evidon-me ne oan ket dedennet gant ar merc'hed. Pa oan pevarzek vloaz e oan bet dimezet gant va zud d'ur plac'h ugent vloaz met n'em boa morse bevet ganti ha diwezhatoc'h ne vevis nepred ganti kennebeut all. Ne sellen ket outi evel va gwreg ha ne oan ket chalet bras ganti d'ar mare-se. Hogen n'eo ket hepken an divizoù diwar-benn hoalusted ar merc'hed - a c'hoari peurliesañ ur roll pouezus e buhez ar wazed yaouank d'an oad-se - a veze distaolet gant va mignoned hogen ivez zoken ar marvailhoù diwar-benn traoù boaz ar vuhez pemdeziek. Soñj am eus bezañ bet un deiz e ti ur paotr yaouank a stagas da gomz ganin diwar-benn prenañ kig ; gervel a reas ur mevel dirazon ha gourc'hemenn a reas dezhañ mont da breñañ kig. Feuket e voen ha ne zarempredis ken ar paotr-se. Gwelloc'h e kave va mignoned ha me va unan komz diwar-benn danvezioù uhel : natur mab-den, ar gevredigezh, Sina, ar bed hag an hollved!

Dalc'hidi entanet an embregerezh-korf e teujomp ivez da vezañ. E-pad ehanoù ar goañv ez aemp da vale dre ar parkeier, krec'h-traon dre ar menezioù, a-hed murioù ar geoded, dre naozioù ar stêrioù. Pa rae glav e tiwiskemp hor rochedoù hag e raemp eus an abadenn ur "gouronkadenn-c'hlav" ; pa veze grizias an heol e tiwiskemp ivez hor rochedoù hag e raemp eus an abadenn ur "gouronkadenn-heol". Kousket a raemp dindan an amzer pa veze dija koulz ar rev ha zoken e miz Du ez aemp da neuñ er stêrioù. Kement-se a veze graet dindan an anv a "c'hourdonerezh-korf". Talvoudus kenañ e voe moarvat evit stummañ ar galeded a gorf am eus bet kement ezhomm anezhi diwezhatoc'h em ergerzhadennoù dre Su Sina hag a-hed an ergerzhadeg-veur eus Kiang-Si d'ar gwalarn.

!zhiristank bras a stagis da eskemm gant kalz studierion ha keneiled e kêrioù ha keodedoù all. Nebeut ha nebeut e krogis da veizañ e oa ezhomm eus un aozadur frammet startoc'h. E 1917 gant un nebeut keneiled all e kroujomp an Hsin Min Hstieh Houi ("Kevredigezh studi ar bobl nevez). Bez e oa enni etre seikont hag eikont ezel.

An anvioù eus kalz eus ar re-se a zlee dont da vezañ brudet er gomunouriezh sinaat hag en istor ar reverzhi sinaat. E-touez ar gomunourion anavezetañ a voe izili eus Hsin Min Hsüeh Houi e oa : Lo Man a zo bremañ sekretour eus poellgor-urzhañ ar Strollad (e 1937); Hsia Hsi a zo bremañ en Arme Ruz an eil talbenn ; Ho Hsien-hôn a zeuas da vezañ Barner-bras e lez-varn uhelañ ar ranndirioù soviedel kreiz hag a voe lazhet diwezhatoc'h gant Chiang Kai Chek ; Kouo Liang, dibar evit frammañ ar vicherourion, lazhet e 1930 gant ar glevgadour Ho Chien ; Hsiao Chou-chang, bremañ ur skrivagner anavezet en Unaniezh Soviedel ; Ts'ai Ho-chêng, ezel eus poellgor-kreiz ar Strollad komunour, lazhet e 1927 gant Chiang Kai-chek; Yeh Li-yün a zeuas da vezañ ezel eus ar poellgor-kreiz hag a "drubardas" diwezhatoc'h evit mont d'ar C'houomingtang hag aozañ c'hweluniadoù kevalaour ; ha Hsiao-chen, ur rener heverk er Strollad? unan eus ar c'hwec'h a sinas an emglev kentañ evit sevel ar Strollad hogen a varvas n'eus ket pellzo diwar gleñved. Lazhet e voe ar pep brasañ eus eus izili HSIN Min Hsüeh Houi e-kerzh enep-dispac'h 1927.

War-dro ar mare-se e voe savet ur gevredigezh all a oa heñvel a-walc'h ouzh an Hsin Min Hsüeh Houi, hec'h anv "Kevredigezh an Hevoud kevredigezhel eus Houpeh". Komunourion e teuas da vezañ un darn vras eus hec'h izili a-c'houdevezh. En o zouez edo Wen Teh-ying, he rener, a voe lazhet e-pad enep-dispac'h Chiang Kai-chek ; ezel eus ar gevredigezh-se e oa ivez Lin-Piao a zo bremañ levier kakademiezh an arme ruz (1), koulz ha Chang Hao karget bremañ eus al labour e-touez an armeoù gwenn. E Peiping e oa ivez ur gevredigezh anvet Fou Hsieh a zeuas diwezhatoc'h un nebeut izili anezhi da vezañ "Tud Ruz". E lec'hioù all, dre Sina, dreist-holl e Changhai, Hangchow, Tientsin (2) e voe aozet kevredigezhioù radikal gant emsaverion yaouank a groge da gaout levezon er politikerezh sinaat.

(1) Kement-mañ a oa skrivet a-raok ar brezel. Gouzout a reer peseurt tonkadur en deus bet Lin-Piao abaoe ; klasket en deus enebañ ouzh Mao-Tse-tong ha ranket en deus tec'hout e karr-nij da Rusia en diwezh ken e voe lazhet en ur gwallzarvoud karr-nij end-eeun.

(2) Tsientsin e voe savev ar "Chou-Wou Hsüeh Houi" pe "Gevredigezh o tihuniñ" a yeas da frammañ ar yaouankizoù radikal. Chou En-lai a voe unan eus he diazezerion, gant an dimezell Teng Ying-ch'ao a zimezas gant Chou En-lai.

Krouet e voe mui pe vui al lod muiañ eus eus ar c'hevredig-
ezhioù-se dindan levezon "Yaouankiz Nevez" ("Hsin Ch'ing-nien),
kelc'hgelaouenn vrudet an azginivelezh lennegel, embannet gant
Ch'ên Tou-hsiou. Kregiñ a ris da lenn ar gelaouenn-se pa oan studier
er skol-vistri hag ez estlammen kalz ouzh pennadoù Hou Chih ha
Ch'ên Tou-hsiou. Dont a rejont da vezañ skouerioù evidon e-pad ur
mare, o kemer lec'h Liang Ch'i-ch'ao ha Kang You-wei am boa dilezet
dija.

D'ar mare-se e oa em spered ur meskaj iskis a vennoziou
a-du gant ar frankizouriezh, ar gempennouriezh demokratel hag ar
sokialouriezh utopak. Trivliadoù diresis a santen ennon a-du gant
"demokratelezh an anontekvet kantved", gant an utopegezh hag ar
frankizouriezh giz kozh, met adal neuze e oan evit mat enep-soudardelour
hag enep-impalaerelour.

Er skol-vistri e oan aet da skoliad e 1912. Va skrid-testeni
am boe e 1918.

(Pennad da heul : Kentc'hoari an Dispac'h)
